

KANTIK ITRON VARI'AR C'HRANN

E PARREZ SPELED

Ton : Patronez dous ar Folgoat.

Diskan

*Itron ar Chrann, o ! Guerc'hez,
 Rouanez an Envou,
 C'hui'zo ive rouanez,
 Mestrez or c'halonou,
 Mari, mamm garantezus,
 Ni ho caro bepret,
 Bepret ni' garo Jesus
 Or Salver benniqet*

I

Ni a deuio d'ho chapel
 Gant guir devotion ;
 Dirac oc'h imach santel
 Ni ho pedo, Itron,
 Ha c'hui a ziguemero
 Peden ho pugale,
 Ha varnomp c'hui a scuillo
 Tenzor grassou Doue.

II

Ni ho pedo aliez
 En on' oll ezomou,
 Dreist oll en dristidiguez,
 Er boan, en ankenniuou :
 O ! grit na deuio biken
 Nicun ac'hanomp-ni
 Da goll ar fisians christen,
 Ha da falgaloni.

III

D'or bugaligou, Mari,
 Abred ni a zesco
 Ho caret, oc'h enori,
 Ha ni o digasso,
 Ni o digasso, ama
 Guerc'hez, en ho kichen,
 Ma teuoc'h d'o benniga,
 O ! Mam ar Gristenien !

IV

Ni o erbedo ouzoc'h
 Muioc'h c'hoas, mamdener,
 Pa deuint divezatoc'h
 Da receo o C'hrouer :
 En o c'halon c'hui' zalc'ho
 Ar grassou precius
 Neve diskennet enno
 Gant corf ha goad Jesus.

V

Ia, mirit, Itron ar Chrann,
 Mirit o eneou
 Bepred pur, chast ha guen-cann
 Eguis liliennou.
 Ac evit ma viñt ato
 Deoc'h ha d'ho Mab fidel
 Astennit noz-deiz varno
 Guerc'hez sacr, ho mantel.

VI

Ni ho ped, o ! mam garet,
 Grit eur sell a druez
 Var or c'herent decedet,
 Grit, dre ho madelez,
 Ma zaint d'al lec'h a rezo
 D'ho cuelet, o ! Mari !
 Da gana, er baradoz,
 Deoc'h gloar ha meuleudi.

VII

Ho chapel, Itron ar Chrann,
 Tro var dro'zo brudet,
 Tud memez eus pell ac'hann
 A vez enni guelelet :
 Evidomp ac evito
 O ! pedit deis ha noz,
 Ma talc'himp oll stard ato
 Da Feiz on tadou coz.

